



## CHAPEL SANT NIKOLAZ E PLUFUR

\* \* \*

### Kantik Sant Nikolaz

1- Feiz grefiv ha karantez 'n hon c'hreiz,  
Savomp hon fedenn, hon mouezh,  
'trezek ur Sant karet 'baoe pell  
E Plufur hag e Tremel.

Diskan- Sant Nikolaz, gant fiziañs vras  
E c'houlenñomp ho pennozh;  
Hon sikourit da vont bepred  
Etrezek ar Baradoz.

2- Mignon ar vugale vihan  
Ha skouer ar yaouankizoù,  
An nefiv, an douar a emban  
A-bell-zo ho purzhudoù !

3- Ganet en Azia-Izelañ,  
Abred da Zoue gouestlet,  
E oac'h Tad-abad da gentañ,  
'raok bezañ eskob anvet !

4- War gador un arc'heskopti,  
E Kêr Myr, ho santelezh  
A splannas 'vel er manati,  
Muioc'h c'hoazh ho madelezh .

- 5- Troet da sikour ar beorien,  
D'o diwall ouzh an 'n em goll,  
C'hwi roe frank an aluzon  
'N ur chom skouer evit an holl !
- 6- Skouer el labour, skouer er bedenn,  
Difenner ar wirionez,  
C'hwi oa e-touez an eskibien  
Bodet e Kendalc'h Nise.
- 7- Pemzek kant vloaz zo tremenet,  
Abaoe ho maro santel,  
Koulskoude ar vrud ' zo chomet  
Eus ho kalloud divarvel !
- 8- Pa oa Bro-Vreizh en he c'haerañ,  
'N amzer an Dugez Anna,  
Ur chapel a zo bet savet,  
E Plufur, 'kichen Tremel.
- 9- An aotrou Filip Kaermaner,  
Tisavour, den a vicher,  
'Savas an tour, ar mogerioù  
'Kreiz ar c'hoad hag ar bleunioù.
- 10- 'Pad an dispac'h a-berzh Bro-C'hall,  
Eo c'hoarvezet un dra fall :  
Lazhet ar feiz hag ar furnezh,  
Ar pardon ' gouezhas iveau.
- 11- Met tud Plufur gant re Dremel,  
A ziredas holl d'ar chapel,  
Evit pediñ Sant Nikolaz,  
Dispong-kaer ha didrabs.
- 12- E miz Mae, d'an nevez-amzer,  
'Tal an dour hag ar rec'hier,  
E tired ar yaouankizoù  
'N ur ganaf ar c'hantikoù.
- 13- Ar mammoù gant o bugale,  
A zeu amañ da vale :  
Sant Nikolaz d'o bennigo,  
Ma teuint bep bloaz en-dro.
- 14- Ha pa zeuy hon eur diwezhafñ,  
Roit dimp c'hoazh ho pennozh,  
Evit ma c'hellimp diskuizhafñ  
'N ho kichen er Baradoz .

### Kanomp a vouezh uhel

1- Kanomp a vouez uhel

Mari Mamm Doue,  
Rouanez Breizh-Izel  
Hag hon Mamm ives.

Diskan: Da Vari, meuleudi

E pevar c'horn ar vro!  
Hon Breizh-ni ' zo dezhi,  
Ha dalc'hmat a vez.

2- En o holl bedennou,

Gwerc'hez venniget,  
E vec'h e kalonoù  
An holl Vretoned.

3- Bep mintin ar poaniour,

D'an daoulin stouet,  
Araok mont d'e labour  
Ho kalv d'hen miret.

4- War gern ar meneziou

Mesaer an deñved  
A gan ho kantikoù  
E-kreiz e loened.

5-Lies e lein an aod,

Liesoc'h war vor,  
E ped ar martolod  
Steredenn Arvor.

6-Pa son teir gwech bemdez

Kloc'h an Anjeluz,  
E laromp teir Ave  
Deoc'h-hu, Mamm Jezuz.

7-Evit plijout dezhi

Hag obtén grasoù,  
Heuilhomp eeun evelti  
Hent ar vertuzioù.

### Kalon dous a Vari

1- Kalon dous a Vari,

Kalon Mamm Doue,  
Ni fell deomp ho meulif  
Bremañ ha bemdez.

2- Piv a c'hellfe laret,

Kalon druezus,  
Pegment e karet  
Bugale Jezuz ?

3- C'hwi hoc'h eus hen gwelet

'N ur c'hraou evidomp,  
War ar plouz astennet,  
Ha paour eveldomp.

4-Ganeoc'h e Nazared,

Ho krouadur santel  
En deus bet labouret  
Da reññ dimp kentel.

5-Ne zomzoù diwezhañ

Sofñj hoc'h eus Gwerc'hez,  
E lare deoc'h bezaf  
Mamm an holl dud kaezh.

6-Roit nerzh ha souten

Dimp ives e Breizh,  
Ha miret da viken  
Ar feiz vat 'n hon c'hreiz.

### Enor ha gloar

Enor ha gloar, da virviken  
Da Jezuz-Krist, Doue ha den,  
Roue ha tad e grouadurion.

Gwechall e vrec'h holc'halloudus  
A hadas ar stered lintrus  
Tro-war-dro d'e dron peurbadus.

Jezuz pegen bras eo !

- |                                                                                                  |                                                                                                           |
|--------------------------------------------------------------------------------------------------|-----------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| Jezuz pegen bras eo<br>Plijadur an ene,<br>Pa vev en gras Doue<br>Hag en e garantez.             | 4- Goude taol ar maro<br>Joaüs me a gano :<br>Torret eo ma chadenn,<br>Libr on da virviken !              |
| 1- Berr kavan an amzer,<br>Hag ar poanioù dister,<br>O soñjal deiz ha noz<br>E gloar ar Baradoz. | 5- Dorioù ar Baradoz<br>Digor ouzh ma gortoz,<br>Ar sent, ar santedez,<br>War o zron azezet.              |
| 2- Pa sellan en Nefivou<br>Etrezek ma gwir vro,<br>Nijal di a garfen<br>Evel ur goulmig wenn.    | 6- Me 'c'hello, evit mat,<br>Gwelet Doue an Tad<br>Gant e Vab eternel<br>Hag ar Spered Santel.            |
| 3- Gant joa e c'hortozan<br>An termen diwezhaf ;<br>Hast am eus da welet<br>Jezuz ma gwir bried. | 7- Pegen dous 'vo klevet<br>Jezuz din o laret :<br>"Deut, servijer fidel,<br>"Deut d'ar c'hloar eternel." |

LA CHAPELLE SAINT NICOLAS DE PLUFUR

Cette chapelle, perdue dans un magnifique cadre de verdure, le long du Yar, entre Plufur et Trémel, a été construite du temps de la splendeur de la Bretagne. En 1488, la Bretagne est encore indépendante; le commerce avec la Flandre et les pays du Nord est en plein essor. Dans la seconde partie de ce 15 è siècle, la Bretagne est riche et florissante. Les industries se développent et les villes prospèrent, alors que la France et l'Angleterre sortent à peine de la guerre de Cent-Ans, et réparent difficilement les ruines accumulées. Dans tout le Trégor se construisent manoirs, églises, chapelles. C'est vraiment la période faste pour la Bretagne.

C'est aussi hélas l'année de la mort du Duc François II , dernier duc de Bretagne. Alors accède au pouvoir en Bretagne une toute jeune fille, la Duchesse Anne, qui sera plus tard deux fois reine de France. C'est dans cette ambiance de progrès matériel et de déclin politique que les frères Beaumanoir construiront cette chapelle de Saint Nicolas de Plufur qui constitue un jalon important dans l'histoire de l'architecture.

Laissée à l'abandon pendant de nombreuses années, cette chapelle de Saint Nicolas recommence à revivre grâce aux travaux des Bâtiments de France et à l'aide bénévole des membres de l'Association des "Amis de la chapelle Saint-Nicolas".